

CANTIC SPIRITUEL

EN HENOR D'AN AUTROU SANT TUDAL,

*PATRON deus a barres Combrit eus a behini ar
pardon en em gavo, ivit an amser da zont da
zeis gouel an Ascension or Salver binniguet.*

VAR AN TON : Santes Mari, Mam Doue.

MEULIT Doue, Combrisis, eus a greiz ho calon
Da veza deoch' roet Sant Tudal evit patron :
Henorit-en assamblez gant devotion parfet
Abalamour gant Doue e zeo calz chilaouet.

Ar mignon-mâ da Zoue, leun eus ur Feis santel
A sortias eus a vro-saus evit ar breiz-isel,
Dre ma vele er vro-ze eur foul a bayanet
Barbar, cruel, aheurtet, goassoch' evit turquet.

Mont a reas da gavout Rivallon-murmaczon
Pihini a voa e yontr ha Roue er c'hanton :
Un niver bras a venach', e vam, e c'hoar Seva,
A voa asambles gantan pa zeuas er vro-mâ.

E vuhez Fêr ha Santel, edifiant e pep poent
A reas ma voe laqueet da abat en e gouent :
Ha pa varvas Tirizien escop eus a Dreguer
E voue choaset en e blaç evit gouarn ar c'harter.

Ar Sant-mâ pa voa yaouanc en devoa dispriget
 An divertissamanchou ha granduriou ar bed ;
 N'en devoa quen plijadur na quen ambition
 Nemet e chom en ilis da ober oraison.

Ar c'helou-ze pa glevas, querquent e refusas
 Ar garg demeus a escop ac un henor quer bras :
 E zeas pell eus ar vro dre vir humilite ;
 Erfin e rencas sentout ouz an Autrou Doue.

Tud a ilis, a studi, tud partabl, gentil vad,
 Tud a justic, bourhisien, tud eus a pep seurt stad
 Och' anaout e voa Sant henvel ouz an ælez
 O devoa er goulennet dre eur memes mouez.

O velet e voa carguet eus an eneou-ze
 Hor patron carantezus ne zianas nos-de
 Da bedi n'autrou Doue ha Jesus e Salver
 Da gass ar bleiz infernal pell deus e zenvet quer.

O pastor mad ha devot, piou a ouffe laret
 An oll c'hraçou a bere e voach' neuse carguet :
 Ho poan, ho pinigennou, ho vertusiuo santel ! . . .
 N'eus den evit explica ho puhez celestiel.

Inspirit din, va Jesus, m'ach hellign discleria
 Ar miraclou en deus gret ar prelat santel-mâ
 Goude e varo eurus ac e-pad e vuhe
 Trugarequeomp, Combrisis, madelez eun Doue.

Ar bugaligou infirm gant clenvejou dalc'het
 dre e bedennou fervant a vige pareet.

Gant eur feiz cre de ilis cassit ho pugnale
 Eno eus o c'hlenvejou e zint alies pare.

Rentet en deus d'an dud l'or usaich eus o memprou ;
 Chasseet en deus an diaol eus a galz a gorfou :
 D'ar re zall en deus rentet ar guelec desiret ,
 Ar c'hlevet d'ar re vouar , d'an dud clàn ar ye'chet.

Bez e voa trugarezus en andret an dud paour
 Ne esperne evito nac ar'hant nac aour ;
 En e hano , Combrisis , soulagit , me ho ped ,
 An dud paour eus ar c'harter gant carantez parfet.

Un den a fallas dezan devi e relegou
 O saul a reas en t'ân gant an oll paperiou ,
 Mais eur c'hræc goz , courachus , Doue e inspiras ,
 A lamas e creiz ar flam ac o saveteas.

Mar fell deoch' , Combrisis , meritout protection
 A Sant Tudal binniguet , ho tad hac ho patron ,
 Renoncit d'ho pec'hejou ; ha chilaouit e vouez
 Ha Doue ho recevo gantan en e balæz.

Me ho suppli , Combrisis , imitit ho patron
 Dre e zaouarn da Zoue offrit oll ho calon :
 Ne ouzoch' nac ar bloavez , nac an heur , nac an de
 Ma ho calvo ho parner dirac e vajeste.

C'hui och' eus en ho parrez diou zoneson caer ,
 Sant Tudal ho cuir patron , itron Varia Sclerder.
 An oll dud eus ar c'hanton dre guir devotion
 A zeu oll da implori e intercession.

En enor da vam Doue , an itron Varia
 Dont a ra pelerinet deus ar vroyou pella :
 Daoulagat a gant vil den so pareet ganti
 A ra e pep corn ar bed e c'hloar , e meuleudi.

Oblijet och' , Combrisis , dreist an dud eus ar vro
 Da veza devot dezi , d'e imita ato :
 Sentit eus va avis mad ha souden en ho touez
 Eus ar vertusiou christen e vo gueleet ar frouez.

Santes Mari , Guer'ches sacr , Sant Tudal binniguet
 D'an devez eus hor maro , n'hon abandonnit quet :
 Pliget ganeoch' m'ach hellimp er gloar ar barados
 Cavout eua de hor bonheur , hor joa hac hor repos.

EVELSE - BEZET GROET.

~~~~~

*Composet gant an Autrou T: Cure eus a barres  
 Combrit , gant autorisation an Autrou Escop eus a  
 Guimper.*

~~~~~

E QUIMPER,

E ty CHAPALAIN, Librer an Autrou Escop.

~~~~~

E QUIMPER,

Eus an Imprimeri S. BLOT, Imprimer an Autrou Escop.